

3


SKOL

---

DAŠ TUMADENN  
▲  
GELENNOURIEZH



▲ NIVERENN ▲



NIVERENN 3.

00000000000000  
00000000000000  
EOST 1958  
AOUT  
00000000000000  
00000000000000

Dastumadenn drimiziec a Gelennouriezh.

RENER:Armañs AR C'HALVEZ,Skol Sant-Erwan, PLOUEG-AR-MOR.

Priz an niverenn : 200 lur. Priz ar c'houmanant: 800 lur.

da gas d'ar c'hont-red:

Abbé Armand LE CALVEZ,Rundavid,PLOUEZEC. C D N. ROAZHON 1911 06.

Prix du numéro : 200 f. Abonnement annuel: ( 4 numéros )  
800 f.

En BREIZH-VEUR HAG EN IWERZHON ,HAG EN AMERIKA :

Kas an arc'hant da :David DAVIES,13 c,Alfred Street,MAESTEG. Morgannwg.  
CYMRU . BREIZH-VEUR.

TAOLENN " S K O L " niverenn 3.

Bodadeg Veur Kevredigezh ar Deskadurezh nevez ( 29.7.58 )

Danevell ar sekretour	p. 2.
Danevell rener ar skol	p. 3.
Danevell ar skolaerez	p. 4.
Danevell an teñzorer	p. 7.
Reoliadur ar gevredigezh.	p. 8.
"Le Monde Bilingue ha Ni"	p. 9.

Hor boest-lizhiri p. 10.

Kenstrivadegoù Bleuñ-Brug Treger  
1956 1957 1958 p. 11.

A-dreuz lenn. p. 16.

P R E N I T

A N N I V E R E N N O U

K O Z H .....

Rummad nevez.

SKOL . 1 . Skol Sant-Erwan.

Rummad kozh.

- SKOL 1.Ar c'hembraeg e skolioù K.
- SKOL 2.Kelennadur ar Frizeg.
- SKOL 3.Douaroniezh Vreizh.
- SKOL 4. 3 0 0 Divinadell.
- SKOL 5. Rimadelloù hag Unangomzoù.
- SKOL 6. Kudennoù ar skolioù er Slesvig.

2 0 0 lur pep niverenn.

SKOL 2."Nedeleg en Breizh ,Pevar fezh-c'hoari",gant Jarl Priel.

54 pajenn

350 lur.

Ha kaset hoc'h eus ho skodenn da  
Gevredigezh ar Gelennadurezh  
Nevez ? Abbé A.Le Calvez,  
 directeur Skol St-Erwan  
 PLOUEZEC. C D N.  
 ROAZHON 863 85.

Périodique inscrit à la Commis-  
 sion Paritaire des Papiers de  
 Presse sous le numéro : 35 323.  
 Hor golo nevez a zo bet tre-  
 setgant Maodez Glanndour.

# BODADeg VEUR AR GEVREDIGEZH DANEVELL AR SEKRETOUR

Ar vodadeg a grogas da 15.30. An Ao. Beleg Dubourg a voe anvet da sekretour. Kadoriad ar Gevredigezh, An Ao. Yann Ar Beg, apotiker e Kemper, a drugarekaas an Ao. Kalvez hag an Itron Galbrun, hag a veulas o labour. Diaes e vefe bet, emezañ, ober gwelloc'h d'ar mare. Da c'houde, Rener ar skol, ar skolaerez hag an teñzorer a lennas o danevelloù, a vo embannet war ar gelaouenn "SKOL".

Evit ar Gevredigezh e voe degemeret ar Reoliadur kinniget gant ar c'hadoriad, hag a oa bet adaozet gant an Ao. Kalvez diwar hini an "Association d'Education Populaire". Unnek ezel a vo er c'huzul-ren hiviziken, ha dibabet e voe daou all da lakaat gant an nav den a asantas paeroniañ ar Skol Vrezhonek. Setu amañ roll izili ar c'huzul-ren gant o micher hag o chomlec'h. ( 1 )

An Itron Kontez de Rohan-Chabot, 11 straed ar Fozioù, Roazhon.

An Dll Marc'harid Gourlaouen, 30 str. ar c'hordennerezh, Douarnenez.

An Ao. Ao. Yann ar Beg, apotiker, str. Astor, Kemper, kadoriad.

Droniou Jean, beajour-kenwerzh, St-Rion, Ploueg-ar-mor, sekretour.

Armañs ar C'halvez, beleg, Skol St-Erwan, Ploueg, teñzorer.

Yeun Ar Gow, noter, Goezeg, ( Finistère )

Fransez Ters, kelenner, 72 str. Henri-Regnault, St-Cloud, S & O.

Jozeb Kadoudal, kenwerzher, Boulvriag, C D N.

Jakez de Quelen, kelenner, Brec'heg-Kozh, Plouc'ha, C D N.

Ronan Huon, kelenner, 132 str. Verdun, Brest,

Andre Grall, doktor hag apotiker, str. Edith-Cawell, Roazhon.

Divizet e voe kas ur goulenn arc'hant da Vleñ-Brug Treger, da "Emgleo Breiz", Brest, ha d'an "Emgleo Sevenadurel", Pariz.

Alan Al Louarn a gomzas diouzh henchañ ar tiegezhioù yaouank d'ober gant ar Brezhoneg. An Ao. Sant, kure e Boulvriag ha sekretour Bleñ-Brug Treger, a lavaras e oa er barrez-se meur a gerent yaouank hag a gomze ar yezh ouzh o bugale, met o doa ezhomm bras eus ur gelaouenn graet diouzh o doare hag o amzer.

War-dro 18.30 ez echuas ar vodadeg veur.

AN ABADENN. Ne oa ket bet graet tamm bruderezh ebet evit an abaden vrezhonek en abeg da Germes ar skolioù laik e bourk Ploueg. Un nebeut bugale ha kerent a zeuas neoazh da selaou war-un-dro gant izili ar Gevredigezh. An holl a seblante bezañ laouen gant ar pezh, daou arvest tennet eus "Nomenoe-Oe" gant Jakez Riou, ha gant an unangomz "Prosez etre Ki ha Kazh", dibunet gant daou baotrig eus Ploueg, 'giz Bro-Ouelou. Tangi Louarn a zisplegas "Nedeleg Breizh", gant Anatol ar Bras, hag an holl c'hoarierien a ganas da echuiñ "Emañ Breizh o sevel" gant Polig Monjarret.

NIVER AN DUD. Tri warn-ugent den a gemeras perzh er vodadeg veur. Dek ezel en em zigarezas, en o zouezh 4 den eus ar c'huzul-ren ha n'o doa ket gallet dont: An Dimezell Gourlaouen, an Ao. Ao. Ters, Grall ha Yeun ar Gow.

G. Dubourg, sekretour ar vodadeg.

1 ) an "Association d'Education Populaire" a ra peurvuiañ war-dro dispignoù ar skolioù kristen.

BUGALE VREIZH O DEUS AR GWIR DA VEZAN KELENNET E BREZHONEG.....

BUGALE VREIZH O DEUS EZHOMM DA VEZAN KELENNET EN UR YEZH PEURUNVAN.

# DANEVELL RENER AR SKOL

Aotrounez ha Mignoned ker,

P'em eus soñjet krouiñ amañ ur skol vrezhonek em eus kavet war va hent teir c'hudenn diaes da zibunañ:hini ar skolaer pe ar skolaerez, hini ar skolidi, ha hini an arc'hant. Gouzout a rit gant pegement a <sup>ket</sup> hag a galon he deus kroget an Itron Galbrun gant he micher nevez a skolaerez. Gouzout a ran ivez gant pegement a boan. N'eo ket brav a-tav bevañ e-touez ar vugale ha truez am bez outi pa glevan anezhi o pignat d'he c'hambrr berr warni. ha skuizh-divi gant un devezhiad labour. Ur bugel warn-ugent o deus heuilhet ar skol vrezhonek ha pa ne gave din ne vefe bet nemet nemp pe c'hwec'h. Arc'hant a-walc'h a zo deuet dimp ivez - n'hon eus klasket ober dispignoù bras - peogwir e chom un tregont mil lur bennak er c'hef pa vo paeet holl vizoù ar bloaz.

Tizhet hon eus ul lodenn eus hor pal:kelenn dre ar Brezhoneg - an Itron Galbrun a gomzo deoc'h hiroc'h diwar-benn se - ha lakaat ar skolidi da heuilh ar skol c'hallek evel paotred vihan o oad; war ar poent-se n'em eus ket bet diaezamantoù ispisial gant skolidi ar skol vrezhonek, zoken evit an doare-skrivañ gallek. A-hed ar bloaz o deus labouret evel ar re all ha tremenet o arnodennoù evelto.

N'eo ket bet kaset hol labour da benn hep poan na trubuilh. N'eo ket un ebat kelenn war an deiz ha d'an noz, d'ar yaou ha d'ar sul rankout ober war-dro pañsionidi. Bet hon eus ivez da blediñ gant ar grip ha pa oan va-unan war droad, gant ar geginerez. N'ouzon ket penaos em eus gallet derc'hel betek Nedeleg.

Ret eo bet stourm enep ar Galleg, anavezet gant an holl, tra ma oa rouez ar vrezhonegerien ampart. Soñjet em eus meur a wech e c'hwitfemp war dachenn an darempredoù etre ar skolidi ha hini ar c'hoarioù. N'hon eus ket trec'het c'hoazh, met war an hent emamp.

Graet em eus va labour gant levenez pa soñjen e oan o stummañ Breizhiz an amzer-da-zont, hag o stummañ tamm pe damm ar c'hellenerezh e Breizh evit an amzer-da-zont.

N'hon eus ket klasket ober bruderezh er c'helaouennoù bras. Ne blij ket din ar pouferezh, hag evit ar Ware ne zere ket ouzh hol labour-enklask. Ar c'helaouennoù brezhonek o deus komzet diwar hor penn: "La Jeune Bretagne", "Al Liamm", "Barr-Heol", "Ar Bedenn evit ar Vro". Pennad Roparz Hemon war "Ar Bed Keltiek" eo en deus graet ar muiañ a blijadur hag a vad dimp. Ul lizher souezhus, skrivet gant ur Breizhad, a zo bet embannet ivez gant ar gelaouenn c'hallek " Le Monde Bilingue".  
( 1 )

Deuet eo ar mare da ziskleriañ hor c'hevredigezh er Prefedti. Bremaik e vo lennet deoc'h ar Reoliadur. Amañ e fell din trugarekaat ar C'hadoriad evit e gomzoù madelezh hag evit e skoazell. A-tav em eus bet degemeret laouen e alioù, hag atav ez on bet laouen da vezañ bet heuilhet anezho. Deut eo ivez moarvat ar mare da greskiñ ni - ver izili ar c'huzul-ren.

Er bloaz a zeu e vo sklaeroc'h ha suroc'h hol labour. Gouzout a reomp en un doare resisoc'h peseurt pal a zleomp tizhout ha penaos en em gemer hep koll re a amzer hag a boan.

( 1 ) Arroudennoù anezhañ a vo lennet izeloc'h. Ar pennad-se en deus lakaet hor striv da vezañ anavezet gant kelennourien a vicher evel Madalen Loewenthal. Kement-se a zo talvoudusoc'h eget pennadoù aozet buan - ha buan gant kelaouennerien o klask keleier dic'hortoz da souezhañ al lennerien.

Un doare kenvuhez a zo etre ar gelaouenn S K O L hag ar Skol Vrezhonek. "Skol" he deus sur-mat digoret an hent d'ar Skol Vrezhonek, hag ar Skol Vrezhonek a ro buhez ha danvez d'ar gelaouenn. Ret eo din anzav ouzhoc'h e kavan gwelloc'h bremañ aozañ levrioù-skol eget sevel studiadennoù evel en amzer-dremenet. ( 1 )

Bez' hon eus war ar stern labourioù a bep seurt en o zouez ul levr da gelenn ar Brezhoneg, heñvel ouzh "ME A LENNO", met uheloc'h, hag a vo embannet e miz here.

Ezhomm a vefe ivez da grouiñ un tamm kelaouenn evit ar vugale. Bez' e vefe ul liamm etre ar Skol hag ar skolidi gozh, ha broudañ a rafe ar re yaouank da lenn o yezh. ( 2 )

Pevar eus hor skolidi eo echu gante amañ o studioù kentañ, ha daou all a oa deuet evit ur bloavezh hepken ne zistroint ken. Ur familh he deus goulennet avat ma vefe degemeret he daou baotr ar bloaz a zeu. Aozañ a rin un doare kelc'hlizher divyezhek evit ar gent.

Eus ur skol-glokaat hor bije ezhomm en gwirionez evit meur a abeg:

- 1 - ar skolidi a vefe koshoc'h, ha barrekoc'h d'en em zibab.
- 2 - en abeg d'o oad ha d'o deskamant e vefent ampartoc'h war ar yezh, e tommfent muioc'h outi, hag e tañvafent muioc'h he lennegezh.
- 3 - ar Brezhoneg a zo degemeret er B.E.P.C. ( 3 )

Ur menoz diaes eo da seveniñ amañ dre ziouer a gelenner hag a skolidi niverus a-walc'h war al lec'h.

Bez' ez eus skolioù hag a glask an tu da gerzhout war hor roudoù. Testenioù resis an eus. Aze emañ moarvat hor brasañ digoll.

Armañs Ar C'halvez.



## DANEVELL AR SKOLAEREZ

Keneiled ker,

Emañ bloavezh arnod ar skol dre ar brezhoneg oc'h echuiñ.

Da gentañ holl eo dleet trugarekaat ar re o deus strivet evit ma vefe gellet ober an taol-arnod-se en ur hetiñ e savfe diwar se un oberenn badus, kreñvoc'h-kreñvañ ha talvoudus. Ret eo lavarout hon anaoudegezh vat a Vreizhiz d'an Ao. Beleg Armañs Ar C'halvez en deus graet holl ar pezh a oa dleet evit ma vefe Skol Sant-Erwan Ploueg-Ar-Mor e-lec'h ma' z eus bet atav graet e lec'h d'ar brezhoneg - evit ma vefe ar skol-se ar greizennig kentañ e-lec'h ma roer ur gelennadurezh d'ar vugale dre ar brezhoneg.

( 1 ) Ar studiadennoù boulc'het a vo kaset da benn memes tra.

( 2 ) Goulennet eo bet gant Yann ar Beg, hag Alan Al Louarn.

( 3 ) Ma vefe roet ul lec'h dereat d'ar Brezhoneg er C.E.P. e vefe aes lakaat holl vugale ar skol war ar brezhoneg.

An hini gentañ holl n'eo ket, rak arabat eo disoñjal Skol Blistin krouet : gant hor c'heneil Yann Kerlann, e-pad ar brezel diwezhañ. Eno eo bet toullet an erv.

Trizek vloaz goude hepken eo bet adkroget gant al labour. Un taol-arnod a oa da vezañ. Graet eo, ha gantañ eta bremañ pep tal - voudegezh un dra c'hraet, evel m'emañ.

Un ugent bennak a Vreizhiz yaouank o deus sunet e-pad 10 miz un danvez sevenadurel disheñvel diouzh an hini roet d'an holl vugale all dre m'eo bet roet dezho e Brezhoneg.

Pep hini anezho en deus kemeret an danvez-se hervez e emskiant, e demz-spered hag e berzhioù dezhañ e-unan. Bez' e c'heller soñjal o deus tennet holl ur gounid bennak eus kement-se. Ne vo ket bet evit hini ebet anezho - a gredan da vihanañ - amzer gollet.

Un testeni, ha pa ne vefe nemetañ: ar re o deus heuliet ar skol dre ar brezhoneg a zo, e dibenn ar bloavezh-skol e-touez ar gentañ d' rederenn er c'hlasoù gallek. Diwar pevar anezho hag o deus un arnodenn bennak da dremen, tri a zo bet degemeret.

A-hend-all, deuat e oant, n'eo ket 'ta, evit deskiñ brezho - neg. Ac'hanta, ar bañsionidi, da lavarout 15 diwar 23 arskol vrezhonek, a lenn, a skriv hag a gomz brezhoneg; pevar bennak anezho gant nebeut tre a faziou. An tri yaouankañ a zeu ganto en o skridoù ur yezh vev ha frazennoù reizh.

Evel c'hwitadenn ne c'hellfen anzav nemet unan: ur paotrig a zo chomet diseblant, klouar-tre ha n'en deus graet striv ebet evit degemer ar gelennadurezh dre ar brezhoneg. Ha koulskoude evit arnodenn dibenn-bloaz - ha n'en deus graet anezhi nemet pennadoù - ez on bet souezhet o welout un danevell skrivet gantañ madik a-walc'h. Marteze, ar bloaz a zeu, peogwir e vo c'hoazh er skol, en em dommo muioc'h ouzh ar yezh.

Peseurt danvez a zo bet kelennet? Lavaret e oa bet e ni - verenn "SKOL" 1 ( R.N. ). Dalc'het am eus gant al steuenn labour-se ha setu berr-ha-berr petra am eus gallet kelenn. ( 1 )

YEZH. Danvez al levrig "Yezhadur berr ar Brezhoneg", gant R. Hemon, gant diskleriadurioù dre gomz ouzhpenn. Ar c'hemmadurioù a zo bet gwelet d'an diwezhañ, e dibenn miz mae, e deroù miz mezheven. Evel-se n'eo ket bet diaezet ar vugale en abeg d'ar pezh o doa desket betek neuze dre gomz pe dre lenn. Ned an ket da lavarout deoc'h e c'houzont ar c'hemmadurioù: ober a reont ganto, darn anezho, aes a-walc'h dre gomz ha dre skrid.

Lennet eo bet ganto - gant an displegadennoù da heul - al levr "ME A LENNO" betek ar bajenn 82, hep ar barzhonegoù. War se en deus graet an Ao. Kalvez ur rebech din: n'em eus ket desket d'ar vugale a-walc'h a zisplegadennoù. Tri o deus desket hepken "NeDeleg en Breizh", "Evnig a gan", hag un nebeudig, displegadennoù ar Bleuñ-Brug. ( 2 )

ISTOR. Degouezhet omp en amzer an duked. Evel just an den en deus bet far muiañ a levezon war o spered eo Nevenoe. Koulskoude dalc'het o deus soñj eus kalzig a draoù a-hend-all. Ur skouer hepken: e Perwenan e oa c'hoarierien "Sant Weltaz" e 'n em aozañ da bignat war al leurenn pa zeredas unan eus ar baotred - anezhañ ur galleger e miz here - da lavarout d'an Ao. Kalvez: "Deuit da welout buan, emañ Konomor e-kichen gant e varvenn hir! "En o skrid-danevell, evit an arnodenn, o deus darn anezho meneget Konomor ha Trifina, daoust ma n'oa ket bet komzet anezho a-raok ar gouel, a-ratozh.

(1) E gwerzh evit 200 lur. (2) Kalz eus ar re all o deus kanter zesket an displegadennoù-se dre forzh klevout. (notenn gant A. Ar C'halvez)

SKIANTOU .N'em eus ket graet evit ar bloaz gant ar c'hentelioù traoù ragaezet gant hor c'heneil Heussaff. En em zigareziñ a ran evit se. Pe n'oa ket ar pennadoù evit klotañ gant ar c'houlz-amzer, pe o c'haven un tammig diaes evit va skolidi. Pa oant desket a-walc'h evit ober o mad diouto, e oa da blediñ gant traoù all. Kavet em eus eünoc'h implijout al levrig "KORF AN DEN". N'eo ket bet studiet penna-da-benn, met ar vugale drezo o-unan o deus adtreset an taolennoù a gaver ennañ.

DOUARONIEZH. Amañ ezomp en em gavet nec'het a-walc'h. N'oa netra evit ar skolidi a oad gant va re. E Galleg o doa desket dija kalzig a draoù. Ret eo bet din ober un dibab evit ma virfe o spered un steuenn diabarzh gwisket gant gerioù brezhonek: stumm an douar; fiñvoù an douar, ar c'houlzoù-amzer; rod an avelioù; penaos sellout ouzh ar gartenn; pelec'h eo lec'hiet an douar er bed; penaos eo betennet; e dorosennadur; e sterioù brasañ; ar broioù pennañ hag o c'hêrbennoù, ha setu holl.

Studiet eo bet Azia, hag evel just Breizh. Evit hor bro em eus klasket d'an diwezh lakaat ul liamm etre an Douaroniezh ha darvoudoù an Istor dre sevel un daolenn eus an doare m'eo en em gavet lodennet Breizh hag an anvioù roet d'ar rannvroioù-se e-doug ar c'hanvedoù.

JEDEREZH. Evit ar jederezh em eus heuliet levrig kelennerien "O B E R."

Hag a-hend-all ? Evel m'em eus lavaret e niverenn I SKOL (Rummad Nevez) graet ez eus bet war-dro ar bañsionidi dalc'hmat e Brezhoneg peogwir e vezent pe ganin pe gant an Ao. Kalvez.

Ur c'hwitadenn all da anzav: koulz an diduadennoù: eno e vez trec'h ar Galleg. Ar boaz kemeret a chom. Poan hon eus bet ouzh o lakaat da gomz brezhoneg etrezo. Er c'hontrol, ouzh taol, e-pad ar baleadennoù, diouzhtu m'en em gavent en un aergelc'h a-du - e Bleuñ-Brug Perwenan, da skouer; - e komzent ar yezh etrezo aes ha brav-tre, zoken en o c'hoarioù.

Klasket ez eus bet deskiñ dezho e ranker evit kaout ur vuhez talvoudus doujañ da lezennoù a ya a-wechoù eus traouigoù ar vuhez betek an darempredoù gant an nesañ hag an emsell evezhiek war an den e-unan. Dre an arnodennoù bihan ez eo bet diskouezet dezho menoz ar Reizhded, al Lealded, ar Gengarantez.

Klasket ez eus bet c'hoazh o lakaat da zizoleiñ ar Gened: kened ar bed, kened ar vro; o lakaat da dañva, hervez o spered a vugel, levenez an arz. Dre vras e c'heller lavarout ez int donezonet: o emskiant a Gelt o tihuniñ moarvat.

Bugale int, ha bugale int chomet, ar c'hoari o vezañ evito ar c'hoant broudusañ. Ar re vrasañ koulskoude o deus diskouezet bezañ gouest da brederiañ tamm pe damm. Kentelioù an Aviel, pe skouerioù hon Istor a zo bet un digarez evito.

Evel m'em eus lavaret dija, ez eus bet tu evit ar bañsionidi da gas donoc'h ar stummañ-spered-se. A-hend-all, petra a c'heller ober en un eurvezh ? Anat eo n'eo ket a-walc'h, met ret eo gouzout n'eus ket tu d'ober muioc'h evit ar mare pa'z eo dav ober diouzh ar lezennoù ha diouzh doareoù ar c'hellennezh.

Ur pal a zo bet tizhet koulskoude: ugent breizhad yaouank bennak a c'hell bremañ implij yezh o bro en o buhez pemdeziek a vugel hag a skoliad. An anaoudegezh-se o deus dastumet e-pad ar mizvezhioù tremenet e Skol Sant-Erwan dre ar brezhoneg.

Setu aze, dre vras, keneiled pezh am boa da lavarout deoc'h. Anzav a rin ouzhpenn, didro, ez eo bet an dachenn-se evidon un andon a levenez kalon a-wechoù. Daoust m'hon eus klasket kenchañ ar baotredigoù war-du an emzalc'h nerzhus, eget war-du ar fromoù-kalon, dis-kentoc'h

kouezet hon eus dezho e oant prizet ha karet, ha diwar un netraig hon eus gwelet, gwech pe wech, e oant stag ouzh o skol hag o doa lorc'h ganti.

Deoc'h e vo bremañ, kerent, lavarout dimp penaos e tleomp kenderc'hel, penaos e c'hellimp ober gwelloc'h c'hoazh. Deoc'h ivez, m'hoc'h eus kavet e talvez e taol-arnod-mañ, ober bruderezh evit ma vo muioc'h a vreizhiz a uhelvennad o reiñ d'o bugale ur seurt deskadurezh dre ar Brezhoneg.

I. Galbrun.



## DANEVELL AN TĒNZORER

degemeret betek ar 15 a viz meurzh 1958: 417 000 lur.

degemeret abaoe: H. Maze, Rouen, 1 000; Dll Gourlaouen, Douarnenez, 1 000; Itron St-Pêr, 9 000; F. Eliès, Ar Baol, 1 000; Yann Cormerais, An Naoned, 1 000; H. Maze, 4 000; René Le Bec, Kemper, 1 000; Yann Ar Beg, Kemper, 10 000; Ao. Allain, Roazhon, 2 000; Ao. Peneg, Carthage, 5 000; I. Marzin, Brest, 1 000; Itron Kemere, Kemper, 3 000; Itron Sant-Pêr, 3 000; Yeun Ar Gow, 3 000; un nebeut izili eus Kelc'h "Jabadao", Pariz (profou prevez) 6 000; A. Ar C'halvez, Ploueg-Ar-Mor, 1 000; F. Ters, 10 000; Dr Breton, Bôulvriag, 1 000; Abad Troal, Plouenan, 1 000;

degemeret en holl betek an 28 a viz mezheven 1958: 486 000 lur.

dispignoù:

diankachoù:	11 390	lur
mizoù-post:	2 710	
levrioù :	19 644	
yalc'had :	20 000	
goproù :	230 880	
niv. SKOL :	11 200	
skod. S.K.-S.T. :	51 755	

347 579

347 579 lur

er c'hef d'an 28 a viz mezheven 1958 :

138 421 lur.

(dispignoù hag a chom d'ober evit goproù gouhere, eost, gwengolo hag ar skodennoù evit ar Surentez Kevredigezhel hag ar Skoazelloù-Tiegezh: 105 988 lur. )

### EVEZHIADENNOÙ.

- 1 ) Kalz a dud a zo chomet hep kas dimp o frof; dre leziregezh pe dre ankouazh ?
- 2 ) Ar bloaz a zeu e vefe ezhom da zastum muioc'h a arc'hant evit gallout reiñ yalc'hadoù-studi ha prenañ arrebeuri-skol a bep seurt.
- 3 ) SKOL, niv. 1, rummad nevez, a zo bet kaset d'an holl brofourien na oant ket koumanantet. Ar arc'hant roet e giz-se d'ar gelaouenn a vo daskoret d'ar Gevredigezh e stumm levrioù.

A. Ar C'halvez.



# REOLI ADUR

## ARTIKLOU PENNAÑ.

Art.1añ. Krouet ez eus bet dindan an anv "KEVREDIGEZH AN DESKADUREZH Nevez" (1) etre an is-sinerien hag ar re a zigemero ar reoliadur-mañ ur Gevredigezh hervez doareoù lezenn ar lañ a viz gouhere 1901.

### PALIOU AR GEVREDIGEZH.

Art.2. Pal ar gevredigezh a zo:

- 1º harpañ e kement doare an Deskadurezh Nevez adaozet evit Breizh;
- 2º ober war-dro dispignoù ar skolioù a heuilho ar pennreolen -noù hag an doareoù-kelenn erbedet gant ar gevredigezh;
- 3º gopraat ar renerien, o faeañ ha plediñ gant o gwelladur hag o retred;
- 4º prenañ pe feurmiñ ar madoù diloc'h a vo ezhomm anezho evit tizhout ar palioù displeget uheloc'h;
- 5º skoulmañ ha mirout darempredoù gant ar c'hevredigezhioù a ra war-dro an Deskadurezh, e-diabarzh ar stern merket gant o reoliadurioù.

Art.7. Chomlec'h ar Gevredigezh a zo e Skol Sant-Erwan, Ploueg-Ar-Mor, Aodoù-an-Hanternoz. (2)

Art.8. Ar Gevredigezh a zo meret, evit netra, gant ur C'huzul-Ren, anezhañ ll ezel, dibabet, evit 3 bloaz, gant bodadeg veur an holl izili.

Art.10. Bep bloaz e vo adnevezet un drederenn eus ar c'huzul-ren; an izili kozh a c'hell bezañ dilennet a-nevez.

Art.11. Ur Vodadeg Veur a vo dalc'het bep bloaz e-pad trimiz diwezhañ ar bloavezh-skol.

Art.12. War-lerc'h ar vodadeg-veur, e tibab ar c'huzul-ren, e-touez e izili hag e-kuzh, ur burev anezhañ ur c'hadoriad, ur sekretour hag un teñzorer. An hevelep den a c'hell bezañ sekretour ha teñzorer. Izili ar burev a vez anvet evit ur bloavezh hag a c'hell bezañ dilennet a-nevez keit ha ma chomont er c'huzul-ren.

(testenn c'hallek ar reoliadur-mañ a zo bet fiziet e Prefedti St-Brieg d'an 9 a viz gouhere 1958; troidigezh vrezhonek gant A. Ar C'halvez )

1.) An anv brezhonek n'eo ket bet degemeret gant ar Prefedti. An anv ofisiel a zo en Galleg: "ASSOCIATION BRETONNE D'EDUCATION NOUVELLE".

2.) An anv brezhonek-mañ n'eo ket bet degemeret. An anv ofisiel a zo: Ecole Saint-Yves, PLOUEZEC, Côtes-du-Nord.

evit bezañ ezel eus ar Gevredigezh:

1.) kas ur baperenn-emezelañ,

2.) hag ur skodenn d'an teñzorer: Abbé A. Le Calvez, directeur  
Skol Sant-Erwan, PLOUEZEC. C D N.  
Kont-red post: Roazhon, 863 85.

izili kevredidi, dezho bugale e Skol St-Erwan, skodenn ebet;

izili kenlabourerien, 1 000 lur bep bloaz;

izili madoberourien, 2 000 lur d'an nebeutañ bep bloaz.

DEGEMERET E VEZ GANT ANAOUDEGEZH VAT AN HOLL BROFOU, BRAS HA BIHAN.

# // LE MONDE BILINGUE " HA NI

" Il est par ailleurs entendu qu'il faudrait surseoir temporairement au bilinguisme dans les régions particulièrement patoisantes: Alsace, Bretagne..."

René DENIS : " CITES UNIES", niv.1, p.20.

" Les Bretons eux aussi sont habitués à cet état de choses. On a fait tout ce qu'il fallait pour cela. Pourtant un certain nombre d'entre eux prennent conscience que l'Assimilation systématique n'avait d'autre but que d'étouffer la personnalité et l'âme de la Bretagne. Car, vous le savez comme moi: "On tue une langue quand on ne l'enseigne pas." C'est l'évidence même qu'écarter une langue de l'école, de la radio, et de la vie officielle, c'est la condamner à disparaître à plus ou moins brève échéance.

Peut-être est-ce dans l'attente de cette échéance que vous proposez de surseoir temporairement en Bretagne au bilinguisme franco-anglais.

Je ne suis pas sûr que cette échéance soit inéluctable, mais ce dont je suis certain, Cher Monsieur, c'est qu'il existe une fraction active de Bretons qui sont aussi persuadés que vous qu'il convient de surseoir - et plus que temporairement - au bilinguisme de type colonial que vous nous réservez. Je vous dirai aussi, que tout autant que vous, ces Bretons sont convaincus de la valeur du bilinguisme scolaire gallois. Ils ont récemment traduit leurs convictions en actes.

Depuis octobre dernier fonctionne à Plouézec, près de Paimpol, une école-pilote où les petits Bretons pratiquent le bilinguisme breton-français, tout comme, au Pays de Galles, les petits Gallois pratiquent le bilinguisme gallois-anglais. Cette école Sant-Erwan veut montrer par là qu'il n'y a place en Bretagne bretonnante que pour un bilinguisme précoce: celui qui implique l'enseignement dans la langue maternelle."

Bartrig BASCLET: " CITES UNIES", niv.7, p.p.36,37.

" On voudrait voir inscrire parmi les Droits de l'Homme:

- a ) le droit à la connaissance développée de la langue maternelle;
- b ) le droit à la connaissance d'une langue de communication internationale mondiale.

Ces deux droits, énumérés l'un après l'autre sont cependant liés; ils ne devraient pas se concevoir l'un sans l'autre, dans la mesure en tout cas où la langue maternelle, première, est suffisamment saisissable pour être fixée par l'enseignement.

A ces droits vient souvent s'ajouter une obligation: la connaissance utilisable d'une langue qui n'est pas nécessairement la langue de communication internationale mondiale, mais "l'autre langue nationale", la langue de l'administration, la langue nationale et officielle du pays dont on fait partie.

Ces principes peuvent faire naître des problèmes scolaires complexes et parfois compliqués, mais pas insolubles, nous semble-t-il. En effet, deux observations importantes viennent à la rescousse; ce sont:

- 1) l'efficacité de l'enseignement linguistique précoce;
- 2) l'utilité d'une base bilingue pour l'apprentissage ultérieur d'autres langues étrangères.

"Le Monde Bilingue": "CITES UNIES", niv.7, ib.

evezhiademn a-bouez:

BANDENN RUZ = KOUMANANT ECHU.....

SKOL ne vez ket kaset d'ar re na adkoumanantont  
ket e koulz.

## HOR BOE ST. LIZHI RI

digant G.R. (24.4.58) "Degemeret em eus an niverenn diwar-benn Skol Sant-Erwan. Ul labour mat a vez graet ganeoc'h. Ret e vefe kaout kalz a skolioù evel hoc'h hini. Diskouezet hoc'h eus ar skouer".

digant P.P. (20.4.58) "Lennet em eus gant plijadur ha levez niverenn diwezhañ SKOL. Kas a ran deoc'h diouzhtu va adkoumanant".

digant P.D. (15.4.58) "Lennet em eus niverenn diwezhañ SKOL, talvoudus-bras evel an holl re all."

digant H.M. (12.4.58) "Ar prof-mañ a zo evit ar skol gant hor gourc'hemmennoù evit al labour kalonek ha dispar a rit e Ploueg."

digant Y.B. (16.4.58) "Gant va gourc'hemmennoù evit ho niverenn diwezhañ ken buhezek eo. Dalc'hit start, war an hent mat emaooc'h. A galon ganeoc'h bepred."

digant J.P. (21.4.58) "Erru eo niverenn diwezhañ "SKOL" betek amañ; va gwellañ gourc'hemmennoù rak bez' eo un dra dudius ha kalonekaus-tre da lenn. Mont a ra dija an traoù war-raok ha mont a raint kalz gwelloc'h a dammoù".

digant Y.K. (20.6.58) "Skol Sant-Erwan a zo an dra bouezusañ en hon amzer".

digant G.D. (31.6.58) "Mantrus eo gwelout pegen warlerc'hiet e chom al lodenn vrasañ eus ar skolaerien, ha pegen skort eo o menozioù. Mil vad a ra 'SKOL' eta."

X digant Y.B. (1.7.58) "Ho trugarekaat a reomp va gwreg ha me evit kement mad hoc'h eus graet d'hor mab a-hed ar bloavezh-skol-mañ. Bezit assur e rin atav kement ha ma c'hellin da zifenn ho skol e pep doare.

X Hon trugarez a gasomp ivez a greiz kalon d'ho kenlabourerez dispar an Itron Galbrun he deus diskouezet kement a ampartiz en he bloavezh-skol kentañ".

digant Y.O. (26.6.58) "Spi am eus e ray berzh hoc'h arnodenn. A bouez bras eo evidomp. Un deiz bennak e vo ret deoc'h zoken ; klask sevel ur skol all e lec'h all."

### barnadenn Roparz HEMON diwar-benn hon niverenn diwezhañ.

"An niverenn-mañ a zo gouestlet penn-da-benn da Skol Sant-Erwan, Ploueg-ar-Mor. An Ao.A. Ar C'halvez a zispleg penaos e voe savet. Ur stourm hir ha pennek eo bet, ur stourm boulc'het-mat bremañ, daoust na ra nemet kre-giñ...

N'eo ket alies e lenner skridoù ken fromus: istor ur striv renet gant tud a-enep "ar gevredigezh hag ar bed a zo en-dro deomp en doare da sunañ hon amzer, hor buhez, hor gouiziegezh, da zinerzhañ hor Bro." Skol Sant-Erwan a zo hiziv unan eus uhellec'hioù Emsav Breizh. Eno, e-lec'h tabutal ha pompadiñ, e labourer. Stummañ ar rummoù da zont, reiñ skouer d'ar skolioù all, difraostañ tachenn ar gelennadurezh vroadel. N'eus ket un oberenn a zellez bezañ skoazellet muioc'h eget Skol vrezhonek Ploueg-ar-Mor." diwar "AR BED KELTIK", miz mae 1958.

digant A.L. (14.4.58) "Lennet em eus gant kalz a evezh niverenn SKOL gouestlet da Skol Sant-Erwan. Gant an dastumad skridoù-se e weler splann al labour difraostañ o vont war-raok. Spi am eus e kompreno pep stourmer hon emsav talvoudegezh don al labour-se a zo e gwirionez unan eus diazezoù efedusañ silvidigezh hor yezh hag hor sevenadur".

# KENSTRI VADEGOU BLEUN-BRUG T REGER

PERROZ - GWIREG      1956.

Niver ar skolidi hag ar skolioù:

Paotred: Boulvriag	15 skoliad	Merc'hed. Boulvriag	10 skoliadez.
Bulien	10	Bulien	13
Pempoull	13	Kallag	27
-----	-----	Ploubêr	32
3 skol	38 skoliad.	Rospez	13
		Tregastell	8
		-----	-----
		6 skol	103 skoliad.

En holl : 141 skoliad  
9 skol. (1)

Niver ar genstriverien:

Merc'hed	displegañ	lenn	kanañ	Paotred	displegañ	lenn	kanañ
bihan	13	13	27	vihan	3	0	6
krenn	13	38	21	krenn	2	0	6
bras	11	17	22	vras	2	0	7
	-----	-----	-----		-----	-----	-----
	37	68	70		7	0	19

~~175~~ kenstriver  
26 kenstriver

En holl ~~209~~ kenstriver.

Tresadennoù:

merc'hed bihan : 1  
krenn : 11  
bras : 37

Paotred vihan : 44  
krenn : 22  
vras : 16

82

skolioù: Kallag  
Pempoull  
Plouc'ha  
Pontrev  
Rostren

skolioù : Kallag  
Pontrev  
Ploueg-ar-Mor (2)  
Gwareg.

En holl: 9 skol.  
141 tresad.

Danevelloù:

Ploubêr : 19  
Rostren : 4  
-----  
23

Ar C'hozh-Varc'had : 11

En holl: 3 skol  
34 danevell.

- 1 ) Ar skolioù kemmesk da sk. Bulien, a gont evit div skol.
- 2 ) Paotred Ploueg a oa chomet er gêr en deiz-se en abeg da Germes o skol a vez dalc'hmat da geñver gouel ar Pantekost.

ROSTREN 1957.

Niver ar skolidi hag ar skolioù.

Merc'hed: Boulvriag	Plougraz	Paotred: Boulvriag
Groñwel	Plounevez-K	Gwareg
Gwareg	Pelant	Groñwel
Logivi	Mael-Karaez	Pempoull
Perret	Ar Roc'h-Derian	Elejidi
Plejidi	Rostren.	Ploueg
<u>Plougernevel</u>		<u>Gwengamp, Itron Varia.</u>
13 skol		7 skol.

En holl: 20 skol  
 war-dro 350 skoliad (en o zouez un nebeut tud vras deuet evit kenstrivadeg ar c'han ha "Kan ha Diskan".)

Niver ar genstriverien.

Merc'hed	lenn: 0 + 12 + 9 = 21 (1)	Paotred: lenn	54 (10 27 17)
	displ: 7 + 24 + 9 = 40	displegañ:	9 ( 2 6 1)
	kanañ: 12+34+22 = 68	kanañ	36 ( 7 17 12)
	<u>lazioù-kanañ : 125</u>	<u>lazioù-k : 53</u>	
	kenstriverized: 254	kenstriv. 152.	

En holl : + 226  
 + 178 bugel eus al lazioù-kanañ  
 406 kenstriver.

Tresadennoù:

skolioù: Groñwel, Tregrom, Gwareg Lannuon, Jeanne d'Arc, Plouc'ha, Pontrev, Rostren. ( 121 tresadenn)	skolioù: Pempoull Ploueg Pontrev. ( 61 tresadenn )
En holl : 10 skol.	182 tresadenn.

Danevelloù:

Groñwel : 2	Groñwel : 1
Tregrom : 1	Ploueg : 2
<u>Rostren : 1</u>	<u>3 danevell.</u>
4 danevell.	
En holl : 7 danevell.	

PRENIT EVIT HO SKOL HAG EVIT HO KOUELIOÙ :

300 . DIVINA DEL L 200 lur.

RIMADELLO Û hag UNANGOMZO Û 200 lur.

NEDELEG EN BREIZH

PEVAR FEZH-C'HOARI 350 lur.

en gwerzh e ti "SKOL".

1 ) ar sifroù a ro niver ar c'henstriverized evit pep rummad:re vihan, re grenn ha re vras.

PERWENAN      1958.

Niver ar skolidi hag ar skolioù:

Merc'hed	Boulvriag	17	Paotred	Boulvriag	15
	Kallag	19		Landreger	27
	Kamlez	24		Ploueg-ar-M.	19
	Perwenan	25		Pempoull	9
	Plejidi	15		<u>Plejidi</u>	<u>14</u>
	Plouvouskan	10		5 skol	84 skoliad.
	Priel	3			
	Ar Roc'h	13			
	Senven	34			
	<u>Tregrom</u>	<u>21</u>			
	10 skol	181 skoliadez.			

En holl : 15 skol,  
265 skoliad.

Niver ar genstriverien:

Merc'hed	displegañ	lenn	kanañ	Paotred	displegañ	lenn	kanañ
bihan	2	1	19	vihan	2	5	18
krenn	35	23	55	krenn	7	20	33
bras	<u>16</u>	<u>10</u>	<u>23</u>	vras	<u>10</u>	<u>6</u>	<u>13</u>
	53	34	97		19	31	64

184 kenstriverez  
114 kenstriver

En holl 298 kenstriver.

Tresadennoù:

merc'hed bihan :	7	Paotred vihan :	16
krenn :	20	krenn :	34
bras :	<u>34</u>	vras :	<u>11</u>
	61		61
skolioù: Boulvriag :	1	skolioù : Kallag :	2
Kallag :	18	Landreger :	4
Perwenan :	10	Ploueg :	53
Plouc'ha :	27	Pontrev :	<u>2</u>
Pontrev :	<u>5</u>		
5 skol	61 tresadenn.	4 skol	61 tresad.

En holl : 9 skol  
122 tresadenn.

Danevelloù:

Tregrom :	5	Ar C'hozh-Varc'had :	13
		Ploueg :	<u>9</u>
			22

En holl : 27 danevell.

Evezhiadennoù skrivet gant an Ao. Bourdelles, barner war an displegañ.

"Santet e vez kalz war ar merc'hed bihan levezon ar vestrez-skol. Di-wall dreist-holl diouzh ar pouez-mouezh war an diwezhañ. Mont gorre - "koc'h. Distagañ ervat. An ton peurvuiañ a zo mat.


Evit barn ervat e vi-  
"je ret adwelout ar re gentañ, evit gellout komz ganto brezhoneg hag e-  
"vit o lakaat da lenn ur pennad na vefe ket bet studiet en a-raok".

Kartennoù ar parrezioù o deus bet kaset kenstriverien .


o = 1 skol

⊖ = 2 skol


⊖ = Boulvriag.



⊖ = Boulvriag  
Groñwel  
Gwareg  
Mael-K  
Plejidi



⊖ = Boulvriag  
Plejidi.



Tablenn ar skolioù o deus bet kaset kenstriverien. ( 1 )

skolioù paotred.

Boulvriag	P R P	
Bulien	P . .	
Ar C'hozh-Varc'had	. R .	
Gwengamp ( Itron V.)	. R .	
Groñwel	. R .	
Gwareg	. R .	
Landreger	. . P	
Pempoull	P.R P	
Plejidi	. R P	
Ploueg	. R P	10 skol.

Logivi	. R .
Mael-Karaez	. R .
Perred	. R .
Pelant (Plélauff)	. R .
Plejidi	. R P
Ploubêr	P . .
Plougernevel	. R .
Plounevez-Kintin	. R .
Plougraz	. R .
Plouvouskan	. . P
Perwenan	. . P
Priel	. . P

skolioù merc'hed.

Boulvriag	P R P
Bulien	P . .
Kallag	P . P
Kamlez	. . P
Groñwel	. R .
Gwareg	. R .

Ar Roc'h-Derian	. R P
Rospez	P . .
Rostren	. R .
Senon (Senven-Lehart)	R P
Tregastell	P . .
Tregrom	. R P 24 skol

En holl 34 skol.

Evezhiadennoù diwar-benn ar c'hartennoù hag ar gendaolenn.

- 1 ) N'eo ket bet merket ar parrezioù o deus bet kaset tresadennoù ha danevelloù hepken.N'eus bet anezho nemet div:Pontrev ha Plouc'ha.
- 2 ) An niveroù a roomp amañ a zo resis a-walc'h war vetek nebeut evit B.B. Perroz ha Perwenan.Kaset e oa bet d'ar skolioù follennoù da leuniañ a-raok ar gouel.Siwazh,daoust ma vez goulennet,ne vez ket merket atev gant rener ar skol pet skoliad a vo o kenstrivañ.

E 1957 n'oa ket bet kaset seurt follennoù.Darn o doa aozet ur follenn bennak;kalz,hini ebet.Furchet en eus e follennoù ar varnerien evit dizoleiñ da vihanañ parrezioù ar skolioù.Pezh ne oa ket aes zoken rak bugale ' zo a ro anv o farrez c'henidi<sup>k</sup>e-lec'h anv parrez o skol.

- 3 ) Anat eo diouzh ar c'hartennoù,hag ar gendaolenn dreist-holl,ez eus un nebeut skolioù hag a glask en gwirionez kenlabourat gant ar B.B. Spi an eus e vo tu dimp d'o skoazellañ muioc'h c'hoazh en amzer-da-zont, ha pa ne vefe nemet dre sevel gouelioù-dibab diwar skouer reoù Bro-Leon.

- 4 ) 34 skol diwar 115 o deus kemeret perzh er c'henstrivadegoù, 29 %.
- 10 skol-baotred diwar 32 ( 27 + 5 skol-gemmesk ) , 31 %.
- 24 skol-verc'hed diwar 88 ( 83 + 5 skol-gemmesk ) , 27 %

AR PRIZ " D I R - N A - D O R ",

anezhañ ur priz kentañ a 6 000 lur hag un eil priz a 4 000 lur,a vez roet d'an 2 skol o devez labourer ar muiañ war ar yezh e-pad ar bloaz, pe ar bloavezhioù tremenet.N'hell ket bezañ gonezet daou vloaz diouzh-tu gant an hevelep skol.

- |       |   |                                 |
|-------|---|---------------------------------|
| 1956. | 1-añ priz :Ploubêr( plac'hed )                                  | 2-1 priz :Bulien (skol gemmesk) |
| 1957  | 1-añ priz :Plejidi(paotred )                                    | 2-1 priz :Gwareg (merc'hed)     |
| 1958  | 1-añ priz .ex-aequo : Boulvriag (merc'hed) ,Tregrom (skol gem.) |                                 |

( 1 ) P = Perroz R = Rostren P = Perwenan.



# A. DREUZ LENN

## EN BREIZH.

Gouelioù-dibab B.B.Leon. (B.B. mezeven, 1958) Unan eus talvoudusañ taolioù-osa bet graet biskoazh gant ar B.B. eo moarvat "gouelioù-dibab" Bro-Leon e Plougernev, Kleder ha Lokournan-Leon. D'ar beure e vez kenstrivadegoù, ha d'an abardaez un abadenn gant ar wel-lañ kanerien ha displegerien hag al laziou-kanañ. ( 1 )

E Plougernev en em gavas bugale eus 8 skol: 111 evit kanañ ha 93 evit displegañ. En holl: 204.

E Kleder, 10 skol. 192 a vugale evit kanañ ha displegañ.

Ne gomzer e neblec'h eus kenstrivadegoù danevellañ ha lenn.

"Erreur et non-sens", ur pennad gant Abanna ( an Dr G.Etienne) diwar-benn emzalc'h pobl Vreizh e-keñver ar Galleg hag ar "brezhonegoù": ar vrezhonegerien a zilez tamm-ha-tamm o rannyezh evit degemer ar galleg unvan...nemet ha kinniget e vefe dezho e koulz ur brezhoneg unvan barrek da zisplegañ o holl venozioù. ( "Dispac'h", niv.4, mae 1958.)

Barrek da gomz 30 yezh ! Ur medisin eus ar C'hastell-Nevez, an Dr Marcel, en defe desket un 30 bennak a yezhoù disheñvel, a-drugarez, emezañ, d'an div yezh en doa komzet a-vihanik e Gwaien: ar Brezhoneg hag ar Galleg. N'eo ket bet deuet a-benn da lakaat e verc'h henañ, 2 vloaz, da gomz Galleg ha Saozneg, ha setu perak en deus divizet e teskfe e vab yaouankañ 12 miz, ar brezhoneg da gentañ. Mouezh ar furnez, na petra 'ta ! ( diwar "Le Telegramme", miz gouhere 1958.)

## EN IWERZHON.

Skol-lojañ iwerzhonek. E-doug miz genver diwezhañ ez eus bet digoret e Glanmire, kontelezh Cork, ur skol-lojañ evit bugale etre 7 ha 12 vloaz, hag a implijo an Iwerzhoneg hepken. (2)

Kelennet e vo ar baotred hag ar merc'hed a vo degemeret eno war ar yezh, an istor, ar folklor hag ar c'hultur iwerzhonek ha lakaet da zeskiñ ar yezh komzet en ur bloavezh.

An Iwerzhoneg hag ar skolioù-etre. War "Dispac'h", (niv.4, mae 1958 ) hon eus lennet gant evezh troidigezh ur pennad embannet da gentañ war "The Plough" ( "An Alar" ) kelaouenn ar Sokialourien iwerzhonat. Hervez an aozer e vefe bet graet al labour padusañ evit ar yezh er skolioù-etre: pa vez ar re yaouank en oad da gompren he zalvoudegezh kulturel. Met siwazh, 5 % hepken eus ar boblañs a bleustr seurt skolioù, da lavarout eo ar vourc'hizien.

Ar skol dre an Iwerzhoneg. En ur vodadeg aozet gant Departamant an Deskadurezh e Skolaj-Meur Aberystwyth e tisplege nevez'zo ar enseller Domhnallain penaos en em gemered en e vro da gelenn an Iwerzhoneg. Pal ar skolioù evit ar vugale etre 5 ha 7 vloaz a zo deskiñ komz ar yezh. Un hanter eurvezh bemdeiz a vez gouestlet d'ar Saozneg a zo o yezh c'henidik. Dre an Iwerzhoneg e tesker lenn ha jediñ, ha dre an Iwerzhoneg e kelennet al lodenn vrasañ eus an danvezioù.: 81 % eus ar skolaerien o deus un testeni da ziskouez ez int barrek da gelenn drezi. An Iwerzhoneg eo ar yezh-kelenn nemeti e 20 % eus ar skolioù-etre ha stummañ a reer drezi penn-da-benn an danvezmistri.

1 ) .Ret e vefe dizoleiñ un anv all evit seurt gouelioù : Bleuñ-Brug ar skolioù, Bleuñ-Brug ar yaouankiz ...T'eo a vefe rannet d'ober gant pep Bleuñ-Brug bihan un doare kendalc'h e-pad un devezh pe un devezh hanter.

2 ) Bez' ez eus dija skolioù all heñvel ouzh houmañ.

Pa vez ar skolidi ll vloaz e tleont bezañ ken barrek war an eil yezh ha war eben .Evit an arnodenn ne vez graet diforc'h ebet etre an Iwerzhonegerien a-vihanik hag ar Saoznegerien a-vihanik,a vez peurluiad ken ampart hag ar re gentañ war ar yezh vroadel.

An aergelc'h saoznek eo a lazha ar yezh en-diavaez d'ar skol. ( hervez " Y FANER",26 a viz mezheven 1958.)

EN BRO-C'HALL.

"Lou Provencau a l'Escolo",ur gevredigezh skolaerion,he deus embannet nevez ' zo daou levr evit ar skolioù:Un dastumad lennadennoù renket hervez an danvez hag un dastumad "Pennadoù dibabet e Mireille".(hervez ar gelaouenn "Syndicalisme Universitaire", 25 ebrel 1958 )

EN EUROPA.

En Fryslân. Abaoe m'eo bet votet e Parlamant an Izelvroioù al lezenn "Cals" e 1955 ez eo aet war greskiñ bep bloaz niver ar skolioù divyezhek.Tregont a oa anezho e miz du 1957.Muioc'h a vefe c'hoazh,ma vefe a-walc'h a skolaerien barrek da gelenn dre ar Frizeg. ( hervez ar gelaouenn "Frisian News Items",miz du 1957 ,Michigan,U.S.A.)

Kelennerzh ar Sloveneg en Karintia ( Aostria ).Hervez an danvez-lezenn (1) e c'hell an holl Sloveniz yaouank,war c'houlenn o c'herent,bezañ kelennet en o yezh adalek ar skol-vabiged betek ar vachelouriezh.Tri bloaz a vo roet da "stad" Karintia da lakaat al lezenn da dalvezout.Bez' e vo meur a zoare skol:

- 1 ) Skolioù slovenek,gant an Alamaneg da eil yezh hag a vo kelennet 6 eurvezh bep sizhun.Bez' e vo anezho skolioù-izel ha skolioù-etre.
- 2 ) Skolioù divyezhek.E-pad an tri bloaz kentañ e vo kelennet an div yezh kement-ha-kement.Adalek ar 4-et bloavezh e vo implijet an Alamaneg dreist-holl;graet e vo gant ar Sloveneg 3 eurvezh bep sizhun.Er skolioù-etre (Hauptschule) e vo kelennet evel just dre an Alamaneg;ar Sloveneg,3 eurvezh bep sizhun hepken. ( 2 )
- 3 ) El lec'hioù ma 'z eus nebeut a slovenegerien e vezo kevrennoù pe glasoù slovenek er skolioù alamanek.

E Klagenfurt ez eus ur gevrenn slovenek er skol-vistri evit an danvez kelennerien war ar Sloveneg.

E-pad an tri bloaz-se ivez e vo graet un enklask evit gouzout niver ar vugale a garfe o c'herent o lakaat e skolioù slovenek.N'eo ket ret prouiñ e vezer a ouenn sloveniat;a-walc'h eo diskleriañ e vezer sloveniat.

(hervez "EUROPA ETHNICA",kentañ levrenn 1958 )

- 1 ) Aprouet e vefe bet an danvez-lezenn gant Ministr an Diavaez e Yougoslavia.
- 2 ) Ar Sloveneg a c'hellfe bezañ saveteet gant skoazell ar skolioù slovenek,met lazhet e vo tamm-ha-tamm gant skoazell ar skolioù "div yezhek".Kement-se a c'hoarvez bemdeiz e skolioù saoznek Kembre.  
Souezhus eo he dije asantet Yougoslavia d'ur seurt treuzvarc'had.Renerien an Emsav Sloveniat o deus spi moarvat da wellaat kelennerzh ar yezh en amzer-da-zont

E PEP BRO E VEZ KELENNET ER SKOLIOU UR YEZH PEURUNVAN.

BUGALE VREIZH O DEUS AR GWIR DA VEZAN KELENNET E BREZHONEG PEURUNVAN.

EN AFRIKA.

En Aljeria. ( " Le Problème scolaire en Algérie" e "Syndicalisme Universitaire", bulletin bi-mensuel du Syndicat Général de l'Education Nationale ). Ur pennad talvoudus diwar-benn kelannadurezh an Arabeg aozet gant Burev Akademiezh Alger.

An Arabeg a vez kelennet evel ur yezh estren daoust ma'z eo komzet gant 9/10 eus ar boblañs !

Er c'hentañ derez e vez kelennet evel danvez diret 2 eurvezh bep sizhun da vugale ar skolioù-klokaat adalek an eil bloaz gant 200 arabeger diplomet gant Ensavadur ar Studioù Uhel Islamat. E-diavaez an euriou-skol e ra ar skolaerien-se, anvet moudered, war-dro an deskarded a danze an arnodenn-antren e 6-et klas al liseoù Gall-ha-Muzulmat.

En eil derez ez eus 46 lise pe skolaj diwar skouer reoù Bro-C'hall. Diwar 46 000 skoliad, 12 000 o deus dibabet an Arabeg evel kentañ pe eil yezh "estren".

Abaoe 1951 ez eus pevar lise Gall - ha -Muzulmat, tri evit ar baotred hag unan evit ar merc'hed, hag a gellenn dre an Arabeg an danvezioù islamat ha dre ar Galleg an danvezioù all. (1) Ar skolidi a zanze div arnodenn: ar vachelouriezh ha diplom an Ensavadur a zigor dezho dorioù ar skol-se evit bezañ diwezhatoc'h mouder, barner pe vinistr muzulmat.

Rebechet e vez d'al liseoù Gall-ha-Muzulmat lezel a-gostez Europiz vihan na vezont ket barrek d'aozañ poelladenn arabek arnodenn-antren er 6-et klas; sammañ ha skuizhañ o skolidi gant re a labour; ha chom hep mont don a -walc'h en anaoudegezh ar c'hultur arabek.

Neoazh e vezont meulet gant aozerien ar pennad: " O aergelc'h a zo dispar. Souezhet e vezer gant kenurzh ha gred ar skolidi da studiañ an danvezioù arabek kerkoulz hag an danvezioù gallek. Rouez-tre eo enno ar skoliad didrabas ha tazonet. Diouzh ar savpoent-se ez eo bet ur berzh al liseoù-se".

Kinnig a reer meur a wellaenn evit kelennerzh an danvezioù arabek er c'hentañ hag en eil derez. "...Ni a soñj ne zleer ket diwriziennañ ar vugale eus o c'helc'hiadur kevredigezhel. Hervez o hengoun kulturel e tleont bezañ desavet da gentañ. Ar c'hultur doubl gwirion, da lavarout eo mestroni ar yezh hag ar c'hultur gallek ha hini ar yezh hag ar c'hultur islamat n'hell bezañ tizhet nemet gant un niver bihan a dud, dezho ur spered digor dreist-muzul. Ar reo -lenn vras-se a zo harpet gant berzh dispar un nebeudig tud". (2)

Er C'hongo Belgiat. diwar "Revue Analytique de l'Education", meurzh 58. " L'Education au Congo Belge". ("Dastumadenn analutek an Deskadurezh"), embannet gant an Unesco.

An dastumadenn-mañ a embann bep miz ur roll levrioù diwar-benn ur gudenn bennak ouzh o diverrañ. 8-et pennad an niverenn-mañ a ra war-dro yezhoù ar c'helennerezh. Unan hepken eus ar studiadennoù meneget, hag a seblant bezañ bet savet gant ur morian, an Ao. Beleg E. Byusa, a zo a-du gant implijout hepken ur yezh vras evit holl zerezioù ar c'helennerezh. Al levrioù all, aozet gant Europiz, moarvat, a erbed ober gant ar yezhoù indigenek war-un-dro gant ur yezh vras.

1 ) Da lavarout eo ,an Arabeg a zo yezh an amzer-dremenet, hag ar Galleg, yezh an amzer-da-zont !

2 ) Setu an destenn c'hallek: " Nous pensons qu'il ne faut pas déraciner les enfants de leur milieu social. C'est dans leur propre tradition culturelle qu'ils doivent d'abord être élevés. La véritable double culture... ne peut être atteinte que par un petit nombre d'individus ayant une ouverture d'esprit exceptionnelle. Les cas de réussite brillante ne font que confirmer la règle générale".

P R E N I T

EM B A N N A D U R I O U    A L    L I A M M  
 ooo

NEVEZ EMBANNET :

Roparz HEMON. DAFAR GERIADUR ISTOREL AR BREZHONEG, levrenn 1,  
 Lizherenn A. Ar brasañ geriadur brezhoneg bet embannet biskoazh  
 o tont ermaez.

LANGLEIZ : TRISTAN HAG IZOLD, 200 pajenn, 25 skeudenn.

Skeudennoù e-touez re wellañ an arzour.

Ur fazi moulerazh bennak a zo chomet e-barzh, a-wechoù e-keñver  
 kemmaurioù, evel : ur galon karantezus...

An destenn a zo kaer neurbet hag a ra brasañ enor d'hol lenne-  
 gezh. Ur fazi eo koulskoude e-keñver ar yezhadur skrivañ : Ar  
 Goantenn he blev aour ( p. 37 ), Ar Rouanez he blev aour ( p. 47 ).  
 Taolit evezh e skriver ez reizh : Ar Rouanez melen he blev, nemet  
 e tleer lavarout : Koantenn he blev aour, Rouanez he blev aour. Ken  
 bras fazi ez eo skrivañ : Ar goantenn he blev aour, ha skrivañ :  
Ar mab ar Roue e-lec'h Mab ar Roue.

P R E N I T

EM B A N N A D U R I O U    A R    B I B L  
 ooo

Un droidigezh reizh ha skiantel e-keñver an destenn

En ur brezhoneg aes ha disi.

HARPIT ar brasañ striv graet biskoazh evit treiñ ar Skritur en  
 hor yezh.

Levriou bet embannet :

AVIEL SANT MAHE : 250 lur + 30 lur mizoù-kas

KOHELETH : 80 lur + 20 lur mizoù-kas

AVIEL SANT YANN : 180 lur + 30 lur mizoù-kas

DISKULIADUR SANT YANN : 180 lur + 30 lur mizoù-kas

LEVR AR FURNEZ : 180 lur + 30 lur mizoù-kas.

DA VEZAN MOULET HEPDALE : AVIEL SANT MARK, troet gant Marsel  
 Klerg.

Kas an arc'hant da : Melle St Gal de Pons, Palais de Justice,  
 Guingamp, Chekenn-bost 51.940 Rennes.

oooooooooooooooooooo

RAK PRENIT

SKOL

4

skeudennaouet gant Y. P E R O N.

# K ( ) N T A D E N N O U

## K ( ) Z H H A I N E V E Z

Lennadennoù plijus,  
Kentelioù yezhadur,  
Kentelioù war ar verboù,  
Kentelioù war ar geriadur.....

UL LEVR KLOK DA GELENN AR BREZHONEG

E BREZHONEG PENN-DA-BENN.....

1 2 0 pajenn.      5 0 0 lur.

da  
vezañ  
embannet  
e miz here .

### DISTAOL D'AR RAKPRENERIEN:

1 skouerenn	20 % a zistaol	400 lur
5 skouerenn	30 %	350 lur ar pezh.
10 skouerenn	40 %	300 lur ar pezh.
<u>hep mizoù kas.</u>		

Pedet e vezer da baeañ en ur rakprenañ:

Abbé A. Le Calvez, Rundavid, PLOUEZEC. C D N.

Kont-red: ROAZHON 1911 06.

( troc'hañ a-hed al linenn )

### Follenn - rakprenañ.

ANV..... CHOMLEC'H .....

Rakprenañ a ran .....skouerenn eus al levr "Kontadennoù ..."

ha lakaat a ran ..... war gont-red " SKOL".

Deiziad:

sinatur: